



# GOUEL PLOMEN LOGIVI-VIHAN

Binniget ar 6 a viz Du 1898

War don : *Gourc'hemunno Doue Berlevenez.*  
Pe : *Daou hent a zo, etc.*

Me 'garje kâd mouez an estik  
'Vit kana d'ac'h eun tam zonik  
War ar Blomen neve greiet  
Hag aboue dec'h 'zo binniget.

An tremeniad pa ve arri  
Da bardoni da Logivi,  
A chom souezet o welet  
Eur gaër a dra 'zo er vered.

Eur Blomen eo deuz ar c'hoanta,  
Piket, kizellet ar brava.  
Allaz ! pell 'zo eman hep dour !  
En han 'Doue, deut d'he zikour !

« Kaera plomen ! » vije laret ;  
« Doaniuz-braz eo c'he dizec'het !  
« Dre forz gouela d'ar re varo  
« 'Deuz beret, zur, hec'h holl daëro. »

Ar person mad deuz ar barrez,  
Ran e galon gant an enkreuz,  
'Neuz bet roet d'ezi buhe  
O zilan dour en hec'h ine.

Wel-hi breman war he zijen,  
Kempennet brav eo he roben,  
Flistra 'ra dour hep marc'hata ;  
Hini Gwengamp nan e netra !

Enor 'ta d'an otro Person  
Ha d'an otro Mer, e vignon !  
Person ha Mer pa 'n em gordo  
En peb parrez 'rei burzudo.